

- 83 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

115. AN TOUR PLOM

(follenn 80)

Kenta vellas an tan en tour plom
Voa eur bugel bian divar brec'h e vam,

A lavaras da Kemperis :
- Krog eo an tan en ho illiz.

Krog eo an tan en daou goste.
Siwas er c'hreñs e zeo ive.

Me vel an erouant var beg an tour
Ag en enon e forn eur skoul.

Be zo voant c'hoec'h beleg a tregont
Hag hi enon e neun respont

E klasq gout pini vije ar savantan
Da vont var beg an tour da zisput outan.

Person Kemper eo ar savantan
A ia var beg an tour da zisput outan :

- Petra klasqez var dro va zi ?
Me ne don ket bet var dro da hini.

- Ta illiz zo bed intelizet
Gant eur plac'h fall a daou kloarek
Ag a voa en tour noz Nedelek.

~~~~~  
vvvvvvvv

kanet gant Moris Follezour, 25 févr. 1851

(ar pezh dibenn a zo barrennet gant taolioù kreñon  
war an dornskrid)

~~~~~  
vvvvvvvvvvvvvvv